

406

## Son ar Bleiz.

(249, suite).

C'hoant am bez d'ho t'iveritissa  
 Dre ur chanson a nevez. (bis)  
 Mar q'rit dont d'am sicour d'e c'hana,  
 Epad deizioù Molargez.  
 Selaouit ur sonic coant,  
 Joais ha divertissant.

Eus ar Bleiz ar fin maleurus  
 Eo ar but eus va dessin. (bis) (250)  
 Va matier a so qen truezus,  
 M'o laqayo da c'hoarjin.  
 Selaouit...

An difen da zouquey armou  
 En deus grêt d'al loey sauvach (bis)  
 Redec dre galz a gantonioù  
 Da exerci e ravach.  
 Selaouit...

Eus e goad exeo sortiet,  
 En vertus an amnisti, (bis)  
 Bet accordet gant ar Prefet,  
 Ha staguet ouz ar c'ho'hi.  
 Selaouit....

Dre m'andrezioù meo tremenet  
 Oc'h exerci e arrach, (bis)  
 Var e lerc'h en deves lezet  
 Spout, ha trubuil ha domach.  
 Selaouit...

Ar penno' h eus a Lannennoc [?]  
 En deves bet deoret (bis) (251)  
 D'an deved eus a Kerlennoc [?]  
 N'en deves qet pardonet.  
 Selaouit...

Qi an autrou a Lesvenoc  
 So eat en e vouzelloù; (bis)  
 Emâ so ul loen daou-bennoc,  
 Ne ra fors a noblançoù.  
 Selaouit....

Squis ha fatic eo n'em gavet  
 Goude qement a garnach, (bis)  
 En tal ar bourg en deus choaset  
 Euz lannoc da hermitach.  
 Selaouit...

Un ozac'h demeus ar bourg-mâ  
 Eat da querc'hat e loenet, (bis)  
 Deiz ar Chandelour diveza,  
 En deves en rancontriet.  
 Selaouit...

Ar Bleiz p'en deves e glêvet,  
 En deves savet e benn, (bis) (252)  
 Hac adarre so gourvezet  
 Etail var an dachen.  
 Selaouit...

Ne meus lec'h ebet da sponta,  
A vrema eo difennet (bis)  
Na verzo douguet er vro-mâ  
Fusuill nac arm all ebet.  
Selaouit...

Dont a reas am ozac'h yaouanq  
A beuz er d'ar vourgaden, (bis)  
-...t parlant certenmant  
D'ar Mear deus e gavaden.  
Selaouit...

Dionc'h-tu ezous bet deputet  
Eus an dennerien vella, (bis)  
Pere a yase d'e querc'hët  
D'ar vourgaden da leina.  
Selaouit...

(253) Debonjour, Guillermin, emezo,  
Eñ eur disoloi o fenn: (bis)  
Uran ac'hanomp a renco  
Chom brema var an dachen.  
Selaouit...

Mar rancan mervel, emezan;  
Mar de douguet va arret, (bis)  
Ar c'hraç ouzo'h a c'houlennan:  
Accordit din va reget.  
Selaouit...

An oll graçon dit assambles  
A verzo dit accordet, (bis)  
Nemet ar c'hraç eus da vuez,  
Rac sur e verzi larget.  
Selaouit...

Gement ha pa rancan mervel,  
Va c'hassit da Blouescat, (bis)  
Da c'hout ha me vo criminel,  
E presanç er magistrat.  
Selaouit...

(254) Souden evel ul luc'heden  
An tan eus ar fusuillou (bis)  
Eñ deveus en eur moumeden  
Mouguet dezàn e zeizion.  
Selaouit...

Var brancardon eo digasset  
Gant e assassinerien, (bis)  
Erit ma vije presantet  
D'an administratourien.  
Selaouit...

Clederis, servit ho qinou,  
Na dit mui d'ey em vant; (bis)  
Ni voar dre galz a isignou  
Paca bleizi coulz ha c'houi.  
Selaouit...

P'ey em gavo er ho parrres  
Cola vian hac an didoc, (bis)  
Me ho suppli, compagnonez,  
D'ho tro da lamet ho toc.  
Selaouit...

(255) Recompansit mad o c'hourach  
Hac o generosité (bis)  
Pa deus larget al loen saurach  
A ravaje ar c'hontre.  
Selaouit...

Canomp eus an daou dey vaillant  
An action gloriüs, (bis)  
P'o deus grèt an enterramant  
Euz al loen bras furisüs.  
Selaouit...

E Lannoque, Job ar yaouanq,  
Eñ eur placic disolo (bis)  
Eñ deus touet dre e sermant  
Bigen loen ne zevoro.  
Selaouit...

408

En douarou a Lesvelchen  
 E ma e gorf o repos ; (bis)  
 Va c'hredi a ellit certen  
 E chom eno deiz ha nos.  
 Selavit...

Neh des get rismadellerez  
 Certen e lavarar, deoch ; (bis) (256)  
 Gredit eta d'ar virionez  
 Pehini a brezegar deoch.  
 Selavit...

Mignonet ha mignoneset,  
 Da beb heur demeus an deiz (bis)  
 Bezit atao en ho speret  
 Ar memor eus son ar Bleiz.  
 Selavit...

Oll e qefot oc'h e c'hana,  
 Soulach en ho labouriou. (bis)  
 Rac-se e teuñ d'ho supplia  
 Da gana va c'houplejou.  
 Selavit...

(Vol. IV, p. 249-256.)  
 28 str. numérotées.